

SIKOUR POBL

FAMILHOÙ EVIT AR VUGALE LAOSKET A-GOSTEZ EVIT AR VAKAÑSOÙ

Bep bloaz, e-kerzh an hañv, e vez miliadoù a vugale ha ne c'hallont ket mont da vakañsiñ. Ar Sikour pobl a labour evite, dreist-holl dre ar stignad Familhoù Vakañsoù. E-mesk ar familhoù-se emañ David ha Nathalie Dossier, e Pleuveur-Bodoù, o doa degemeret Nesrine hag he c'hoar Shérine en hañv tremenet. Evit profañ ur bannac'h aer fresk dezhe, hag ivez evit bevañ plijadurioù ar vuhez pemdez asambles gante. Setu o zesteni.

D'ar 7 a viz Gouere 2023. Sonet e oa bet fin ar skol ha Nesrine, 9 bloaz, ha Shérine, 8 vloaz, o doa hast da vont dija. Un toullad devezhioù war-lerc'h e oant o-div en tren evit ur veaj seizh eurvezh asambles gant tud a-youlvat er Sikour pobl, war-du an Enez Veur e Pleuveur-Bodoù evit en em gavout eno gant David ha Nathalie Dossier. « Digeriñ hon familh hag hon zier da vugale ha n'o dez

un tamm tro war ar marc'had, ar predoù e ti Mari C'hlaziou, an tamm digor kalon war an derasenn a-raok debriñ koan, arc'hoarioù stroll evel arc'hezeg bihan pe arc'hartoù... » eme Natalie. « Ar bloaz kentañ e oa leun-leun an implij amzer, ha buan a-walc'h hon doa komprenet e oa mareoù simpl ar vuhez pemdez a blije ar muiañ dezhe. Neuze hon doa kemeret amzer ha bremañ ec'h eomp diouzh o husk » eme David. Evit bezañ familh vakañsoù n'eus ket

« REIÑ A REOMP KALZ DEZHE HAG E RESEVOMP KEMENT DIGANTE »

ket ar chañs da vont da vakañsiñ zo ur soñj talvoudus-kaer evidomp. Neuze e oamp bet e darempred gant ar Sikour pobl e 2022 evit bezañ ur familh vakañsoù, hag er bloaz-se hon doa degemeret Nesrine e-pad pemzektez, ha bet e oa he c'hoar Shérine ganti warlene », eme David ha Nathalie, desaver ha kelennerer er c'hentañ derez, tad ha mamm da deir flac'h vras hag a zeu c'hoazh da dremen un tamm amzer e-kerzh an hañv e ti ar familh.

AN AOD, KEZEG BIHAN, PREDAÑ E TI MARI C'HLAZIOÙ...

Evit an div sizhunvezh-se gant an div c'hoar, a zo bet lakaet en tiegezhioù degemer adalek ar bloaz-mañ, e oa bet aozet un toullad abadennoù, evel krapat er gwez da skouer, hag ivez « ar pezh a ra plijadurioù bihan ar vakañsoù da gentañ-tout : an aod evel-just peogwir emañ 300 metr eus hon zi,

traoù dreistordinal d'ober, estroc'h evit kaout ur roll lez-varn gwenn, ha kaout ar c'hoant da brofañ vakañsoù d'ur bugel ha n'hall ket mont. « Hirie c'hoazh zo ur bugel war dri ha n'a ket da vakañsiñ, a lavar Lydie Bouédec, renerer ar Sikour pobl evit Aodoù-an-Arvor. Kredañ a reomp da vat en deus ezhomme ur bugel da gaout vakañsoù evit kreskiñ mat, paouez da soñjal e traoù diaes ar vuhez pemdez, diskuizhañ ha kaout fiziañs ennañ hag en amzer-da-zont. » Pouezus e oa d'ar c'houblad bezañ degaset un tamm levez ha tommder e kalon o vakañsorezed yaouank, met Nathalie a faot dezhi lavarret un dra ouzhpenn : « Reiñ a reomp kalz dezhe hag e resevomp kement digante ! Ur plas bras o deus en hon familh ha chom a reomp e darempred gante a-hed ar bloaz bremañ. » ●

Stéphanie Prémel



CREDIT: SIKOUR POBL

E-kerzh an hañv tremenet, e fin miz Gouere, e oa en em gavet Nesrine ha Shérine gant ar familh Dossier evit div sizhunvezh vakañsoù.

Devezhioù na ankouer ket evit familhoù en dienez

Bep hañv e vez aozet devezhioù evit miliadoù a familhoù ha bugale gant ar Sikour pobl : an Devezhioù Levez. « Evit ar skourr en Aodoù-an-Arvor e vo e miz Gouere, en Armoripark d'an 10, e Sant-Maloù d'an 18, e zoo ar Bourbansais d'an 23, hag e miz Eost e vo en Enez-Vriad d'ar 1añ, hag e Kingoland d'an 19, eme Julie Taille, buhezourez vakañsiñ. Ar vugale a c'hall komz eus o vakañsoù gant o mignoned da vare an distro-skol neuze, ha bezañ en o bleud evel ar re all... » Mat eo gouzout ivez e kinnig ar Sikour pobl chekennoù vakañsoù ANCV a-hed ar bloaz evit ar familhoù en dienez.